

Meurriad



#28

BANNOÙ-TRESEET
HA C'HOARIOÙ !




KAZETENN VIZIEK - EBREL 2005 - 5 €

NICOLBY • LEDORVEN • FANCH AR RUIZ • AURELIEN.H • LE TREUST •
LOL • FOURNIER • BALAN • CHOUIN • ROBOT • MORVAN • SANGLA

AR
CHAWDER
POTEMINEK

Nicoby



DIGAREZIT, PAOTRED. A-BOAN
M'EO TALVOUDUS PEZHIOU A
SEURT-SE EVIT UR PILHAOUER.

ER C'HONTROL, DIPTUS EO : UR
C'HOUFR EVEL HEMAN, PA VEZ
E STAD VAT, A DALVEZ E BOUEZ
A ARCHANT...

AN ERGERZHADER R. LE DORVEN

Goude bezañ diwelet o c'hi ez a ur familh de vakaññ.
Ur gwallzarvoud o deus bet ha chomet sach eo an oto.
O krapat emañ war an hent p'emañ un oto o tremen.





DEVEZH MA T DEOC'H, ITRON. CHOMET
EO HOR C'HARR SAC'HE'T... EZHOMM-
BRAS HON DIJE DA BELLGOMZ...



O, PATAPOUF.



E, E... EUH... EVIT
AR WECH ON BET
GWELET MAT GANT
AL LOENED...

BEZ' E T'LE DEZHAÑ
SANTOUT E PLIJ
AL LOENED DIN...

HA, DAM-
YA

HAG EVIT AR PELLGOMZ ?




'PEUS KET CHAÑS !
CHOMET EO MA FELL-
GOMZER BOUT... A PAOL
TRUMMA, HEP KELAOUIN !
AET E OAN BETEK KÉR
GANT AR SONJ PRENAÑ
UN' ALL MET 'PETRA' M
EUS KAVET WAR AN HENT
PA OAN O VONT ?
EUZHUSAT KAVADENN...
AN HARV EO, GWELET A
RIT... MET N'EO KET AR
VAKAÑSOÙ EVIT AN HOLL
WAR A SEBLANT...



DA DI ERLE GOZH E C'HELLIT
MONT ! EN TU ALL EUS AN
DUCHENN EMAN-ER O CHOM.
DIGANT GANT AR GREC'HENN.
KEMERIT AR WENODENN
A-GLEIZ, KIT BETEK AR MAEN
BRAS, HA GOUDE A-ZEHOÙ
BETEK AR FEUNTEUN
UR WECH EN EM GAVET AZE
E VO WAR HO TU KLEIZ.
N'EUS KET DA GAOUT AON.
GANT MA CHOMIT WAR EVEZH.

MA... AET OMP NEUZE.
MERSI DEOC'H ITRON



CHOM GANN
PATAPOUF...
ME GRED DIN N'EO
KET AN DUP-SE
MISTRI EUS
AR GWELLAR.

HASTOMP ! MA BAI
HE DEUS DIOUJET
AR YABUEZ KOZH
UN TRA BENNAK.



GANT MA KAVIMP BUAN ROUD OUZH AN ERLE GOZH-SE,
HA MA VO ECHU GANT AN ISTAR-MAÑ. SETU E
LAEZ AR GREC'HENN, A-ZEHOÙ, KET, A-GLEIZ...



POAN 'M EUS D'AM ZREID,
MAMM, SKUIZH ON.

SETU
PENN KENTAÑ
AR WENODENN.
NE VO KET
DA C'HOZARNV
KALZ KEN.



GWIR, MET HASTIT UN TAMM
KREGIñ A RA DA NOZñ

N'HE DOA KET LIJET E RANK-
FEMP TREMEN DRE AR C'HOADOÙ.



A ! SETU
AR MAEN BRAS.



HA NEUZE P N'EO KET
FALL HOC'H HENCHEñ !



ALE ! UR STRIV BHAN C'HOAZH.
WAR-EUN BETEK AR FEUNTEUN.





N'EUS KEN

Cheñch komz ! FANCH AR RUZ E ti PAOL

diar keal Levez





Ur saver tiez war ar gourenezenn...

Savet abaoe ouzhpenn 30 vloaz ez eo hon embregerezh unan eus brasañ stalioù artizan a vez kavet e gourenezenn Kraozon.

Plediñ a ra gant an holl doareoù a denn d'ar sevel-tiez ha degas a ra d'ar pratikoù servijoù klok hag ur servij kempouez hag efedus, a-benn kinnig tiez eus ar gwellañ.




SAVADURIOÙ GUY BRAS

bali Pierre Mendès France 29160 KRAOZON

Pgz : 02 98 26 22 12 - Plr : 02 98 26 22 85

Komzoù
YAOUANK



Ar "school bus" a vez tapet bemdez evit mont d'ar skol.

Anv:
IN
Anv Bihan
Domitille
Oad: 17
Ar vleunienn a bliñ
deoc'h ar muiañ:
ar rozenn
Ar skrivagner:
Daniel Pennac
Ar ganaouenn:
" Ne me quitte pas "
eus Jacques Brel
Ar sport:
marchhegañ
Al liv:
glaz
Ar mare eus ar bloaz:
an diskar-amzer pe
an nevez-amzer
Al loen:
an olifant
Ar film:
Pirates of the
caribbean, Deux
freres, Les cho-
ristes, Mary pop-
pins, Save the last
dance, Dirty dan-
cing...ha re all
c'hoazh...



Domitille, perak bezañ bet dibabet ar Stadoù-Unanet kentoc'h eget unan all ?

Choant am boa deskiñ saozneg, ha Bro-Saoz ne blijje ket re din. Neuze em eus soñjet er Stadoù-Unanet. Tu 'vefe bet din mont da Aostralia, met ar Stadoù-Unanet a seblant bezañ tostoc'h. Ouzhpenn-se eo ma familh a orin eus amañ, ha mignoned am eus da zont amañ, ivez, ar bloaz-man.

Peseurt diforc'h a zo etre ar pezh a oac'h o c'hortoz hag ar pezh ho peus kavet?

Ne oan ket o c'hortoz netra ispisial. Neuze n'on ket bet dipitet. Gouzout a raen e vefe pep tra disheñvel. Neuze em eus kavet gwelloc'h gortoz ha gwelet petra 'vefe war al lec'h. Diforc'hioù a zo etre Bro-Chall hag ar Stadoù-Unanet : izeloc'h eo al live skol amañ ha kalz a draoù a zo dishenvel : n'ez eus ket a implij-amzer heñvel evit an holl dud, pep hini a choaz 8 danvez e penn kentañ ar bloaz, ha peder c'hentel disheñvel hon eus bep hanter-bloaz. Neuze, n'ez omp morse gant ar memes tud er c'hlas. Diaes a-walc'h eo d'ober anaoudegezh gant tud all peogwir n'ez eus ehan ebet e-pad an deiz ha n'hon eus nemet 30 munutenn evit debrñ. Bez' hon eus skol etre 8e ha 3e. Mont a reomp d'ar skol gant ar bus meten, pe gant

va c'hoar peogwir e c'hell an dud blieniñ pa 'z int 16 vloaz. Ar boued neo ket dreist. N'ez eus gwir ti-debrñ ebet. N'eus nemet fast-food. E-kreiz ar Michigan emeon o chom ha kalz a erc'h hon eus e-pad ar goañv. Aboae penn kentañ miz du ez eus erc'h e pep lec'h.

N'eo ket bet re ziaes d'ober gant an amerikaneg ?

Diaes e oa er penn kentañ peogwir e komzont buan, met benn ar fin e oa aes a-walc'h, ha bremañ e teu aesoc'h eget ar galleg!

Pinvidik ha loc'hus eo an dud ?

Er c'horn-mañ n'eo ket pinvidik an dud. Gwechall e labourae an holl e manufakturioù, ha bremañ o deus "labourioù sokial". Met an holl grennarded o deus un "job" ha mont a reont da labourat goude ar skol. Setu ma 'z int pinvidik a-walc'h. Prenañ a reont o diñhad, o c'hirri...

Degemerus int ?

Degemerus-tre!! An holl a gav eo "so cool" pa 'z eus tud o tont eus ur vro estren. Va mignoned a gav eo dreist kaout ur pouez-mouezh, ha c'hoant o defe bezañ "french"...!

Penaos e welont Bro-C'hall ?

Evit an Amerikaned eo Bro-Chall "the Eiffel Tower" ha Pariz. Soñjal a

An holl dud n'int ket tev.

An darn vrasañ a ra kalz muioc'h a sport eget ... e Breizh!!,,

reont eo ul lec'h romantel kenañ. Kavout a reont eo dreist bezañ eus Bro-Chall, ha c'hoant o deus holl da vont di.

Petra a gavt plijus en ho puhez nevez ?

Berr an amzer-skol. War ar maez emeon o chom ha plijus a-walc'h eo peogwir ez eus kalz a loened tro-war-dro : kezeg, yer, lapined, kiz-hier, chas...Bez' hon eus da drochañ koad evit tomman an ti. Desket em eus blieniñ an traktor. Mont a reomp da chaseal ar c'harv, ha da besketa. Bremañ ez eus kalz a skorn war al lenn, peadra d'ober "ice fishing" : graet e vez un toull er skorn ha pesketaet e vez dre an toull !!

Petra a fello deoc'h lavaret d'an dud, ur wech distroet ?

Plijus a-walc'h eo ar Stadoù-Unanet. An holl dud n'int ket tev. An darn vrasañ a ra kalz muioc'h a sport eget ar pezh a vez graet e Breizh!! Met ne ouzont ket fardañ boued... Ne ouzont ket atav implij an teknologiezhioù nevez. Morse, pe dost, ne baeont gant ur gartenn vank pe gant ur chekenn. Atav e "cash". Ha n'eo ket dreist-ordinal d'ur bugel kaout \$100 gantañ pa ya d'ar skol...

Ha cheñchet oc'h un tammig, a-fed personelezh, abaoe m'emaoc'h du-se ?

Mont a ran muioch davet an dud peogwir eo ret din komz gant tud na anavezan ket, en ur yezh ne vestro-nien ket re...Diaes eo bet er penn kentañ, met ur wech e anavezez un nebeud tud, e teu da vezañ aesoc'h aesañ...

Peseurt studioù a rit eno ?

Ober a ran ur "senior year", ar memes tra hag ar c'hlas termen. Neo ket re ziaes, met disheñvel kenañ ouz ar c'hlas termen e Breizh! Ne z eus arnodenn ebet evit kaout un diplom, ha pa zegemeront o diplomoù e fin ar bloaz e vez gwisket ganto tokoù karrez farsus evel ar re a vez gwelet er filmoù!

Penaos e tremen un devezh,er skol, hag en diavaez eus ar skol ?

Sevel a ran war-dro 6e30. Goude un dijuni hag un tamm emgann 'vit ar sal-dour (4 flac'h omp hag ur sal-dour hepken...) e kemeromp ar "school bus" meten evit mont d'ar skol. Kregiñ a ra ar c'hentelioù da 8e05. Va c'hentel kentañ a zo sone-rezh. Seniñ a ran gourrebed e laz-seniñ al lise. Goude-se ez an d'ur gentel fizik ha d'ar "seminar" ur seurt prantad studi a bad un hanter-eur. Ar c'hentelioù all a bad 1e30 gant 8 munutenn diskuizh etrezo. Da 11e38 resis ez an da zebrñ. Un hanter-eur goude ez an evit ar saozneg hag, evit echiñ, ur gentel diwar-benn ar gouarnamant amerikan. Ha setu echu an devezh da 3e! Goude-se e kemeran ar bus evit mont d'ar gêr. Ha ma 'z eus ur match mello-droad, basket-ball, base-ball... ez an d'ar skol en-dro da sellet outo. Setu va devezh!

Petra a rit eus ho vakañsoù ?

N'hon eus ket kalz a vakañsoù... Div sizhun da vare Nedeleg hag ur sizhunvezh da vare Pask. Evit "spring break", e miz Ebrel on aet betek Virginia. Kuitaet hon eus ar Michigan gant erc'h war al leur evit mont da Virginia Beach gant un amzer tomkenañ, met plijus e oa ! Beajet e vez gant ar c'hirri tan: ur c'har-nij a goust re ger ha n'ez eus kazi tren ebet amañ, ha peurvuiañ ne vezont ket implijet. Neuze hon eus tremenet 17 eurvezh er c'har met talvezout a rae ar boan.

Peseurt levezon he do ar veaj-se warnoc'h?

N'em bo ket ezhomm da labourat e-pad ar c'hentelioù saozneg peogwir e komprenan pep tra, memes ar radio hag ar skinwel, ha gouest on da reizhañ ul lodenn vras eus ar faziou a raen a-arok.



Ma c'hoar ha ma c'hoar-gar, ar c'hoar-gar ha ma c'hoar-gar...



Ma c'hoar ha ma c'hoar-gar, ar c'hoar-gar ha ma c'hoar-gar...



Ma c'hoar ha ma c'hoar-gar, ar c'hoar-gar ha ma c'hoar-gar...




Ma c'hoar ha ma c'hoar-gar, ar c'hoar-gar ha ma c'hoar-gar...



Ma c'hoar ha ma c'hoar-gar, ar c'hoar-gar ha ma c'hoar-gar...

GLASDER

RECH DA SAVOUT ANNOU PRODEZH HA LESUMAJ.



AN HAROZ KUZH

1. MA C'HWECH'VED NE VEZ NEMET UR SKOUEREAN OUTI.
2. MA FEMEVED A VEZ KINNIGET DIV WECH.
3. MA FEVARE A ZO EN UR C'HORN.
4. MA ZREDE A ZO UHELOCH EGET UN U HAS IZELOCH'HEGET UN D.
5. MA EIL A ZO ETRE UR B HAS UN E.
6. MA C'HENTAN A ZO TOST OUZH UN T HAS OUZH UN E.


Gant ar 6 lizherenn e kavi anv un haroz a vez gwelet alies e Meuriad.

K	T	O	V	I
C'H	D	E	Z	O
G	H	B	A	E
E	R	M	K	U
O	U	S	L	V
A	N	W	T	D

OLIER & WAOU megadrouk




Phil + Lol - Loth



- A-BLAEN :**
1. Douarenn / Solier - 2. Gavy e vouezh
 3. Metal - 4. N'eo ket ul loen / Eil stomag
 5. Tro / Mamm-gozh / Geus
 6. Gwez / Benveg dir evit ur vag da c'hom a-sav
 7. Oabl / Legad - 8. Sev / Atav war an hevelop ton
 9. Kuzuliañ / Mennozh
 10. Nachadenn / Dereadegezh

- A-SONN :**
- I. Tresañ dre vras - II. Hini bihan ar marc'h / Kerzhout - III. Tres / Ard - IV. Lodenn drañ eus ar siminal / Rannig heññ - V. Tamm t'er a wrier war ar vilgin en-dro d'an ilin / Nachadenn - VI. Dremm / Estlamadenn - VII. Mamenn - VIII. Lurell danvez a vez gwisket gant an dud a Iliz / Tamm bara moan implijet evit Sakramant an Aoter - IX. E penn ar gumun / Tremen - X. Notenn sonerezh / Stumm ar verb bezañ / Adverb

Kinniget gant Patrice MARQUAND



- A-BLAEN :**
1. Lavenn - 2. Yezh semitek - 3. Poanioù
 4. Embregerezh - 5. Laouen / Poble
 6. Sponte / Araogenn kemmesket
 7. Annetuenn - 8. Mestroniet

- A-SONN :**
- I. Kamion - II. Fank / Berradur Aotrou
 - III. Strollad sonerien - IV. Adverb / Liamm
 - V. Induañ gant koulltron / Berradur Itron
 - VI. An hini all - VII. Rummad
 - VIII. Tamm neud hir pe hiroc'h

Kinniget gant Patrice MARQUAND


EUS UR GER D' UNAN ALL




SAVIT EIZH GER OCH IMPLIJOUR AL LIZHERENNOU KINNIGET
A-walc'h e vo ouzhpenn ul lizherenn o tiskenn a linenn da linenn

ROND AL LABOUSED

UR WECH ADKAVET ANNOU AL LABOUSED A ZO TRESET AMAÑ DINDAN E VO ROET DIT ANV AL LABOUS DWEZHAÑ CHOMET E DU



tresañnoù gant Gwen Delalande
ternet eus al levri "rmañdeloù al laboused" KVB



HAT EO, PAOTRED.
KAROET EO
AR C'HARR-SAHH.
BEZ' E C'HELLER
MONT.



VRRRY

OBER A RA DIN
EVEL HA VETE BET
GOULLONDERET,
UR WECH ADARRE.



ALO, SOS EUZHVIL.
HALLUS EO...



OUIZH HO SELAOU.
PETRA EO
HO KUDENN ?



NE ZELOMP KET A-BEAN DA ZILO-
JAN ARREUREL UR PRATIK. BEWEC'H
HA KULIAC'H E DI GLAS PUC'ET WAR
AN DUCHEAN E VEZ GOULLONDERET
HOR C'HARR-SAHH.



UR SKIPATH A ZO
WAR AL LEC'H, DEJA.
HEPMALE EZ ALO
E DAREHPRED
GANEOC'H.



EN EH GAVET OHP, DISPLEGOT EO BET
DEOMP PEP TRA GANT HOR C'HENEZIL.
OBER A RAHP WAR-DRO
HO TILLOADEG.



DIGORIT DIN AN MOR
A-BRAV HA DISTROI
D'HO HAONZENN.



LAOSKIT AR LEVR KOZH-HAN
EN UN UL LEC'H BRAS A-WALE'N
EVEL DEGHER AN HOLL ARRE-
DEURE BET STEUZLET. SOUEZMET
E VEC'H... E E E ...



TRUGAREZ EVIT
HO SKOAZELL,
PAOTRED.



SORSET
E AN AN TI GLAS
GANT UR SPERD KAR-
LEURLOU. TRAWAL'N E OA
KEMER AL LEVR-KOZH A-BEAN
GELLOUT DILLOJAN AR PEURREST.
DIBOELL EO KEMET-SE,
GOUZOUT A RAH A-WALE'N,
MET THOB-SE ENNA.

TAREK

ISTOROUR



CHOUIN

TRESOUR



"Le tsar fou" EP éditions

Tarek : Ha gellout a rez en em gning, ar skol, ar c'hammedoù kentañ war-uz ar vicher ?

Lionel Chouin : Kroget em eus gant studi an Arzoù Pleustrek e lise Kérichen e Brest. Ur wech tapet ar bak em eus klasket tapout ur BTS *expression visuelle* e ESAAT Roubaix. Aze em eus kaset gant *Marc-Antoine Boidin*, a zeuio da vezañ treser an heuliad *Kériath* e ti-embann *Vents d'Ouest*. Asambles hon eus savet *Tsé-tsé*, ur fanzin. Da heul ar berzh dispar en deus bet etouez an 10 skoliad - mignonned deomp an holl anezho - hon eus lakaet en hor soñj prientiñ ar gens-trivadeg evit mont e skol *Bannoù-Treset* Angoulême (ur bloavezh prientiñ e skol an Arzoù Kaer e Kemper). Eno em eus tremenet tri bloaz ha graet anaoudegezh gant

Denis Bajram, a zeuio da vezañ ma istorour evit an heuliad *Les mémoires mortes* embannet gant an *Humanoides Associés*.

Lionel Chouin : Goude un hent ken hir e bed ar skol-veur, petra en deus lakaet ac'hanout da vont war hent ar bannoù-treset ?

Tarek : Sot on gant lenn ha kontañ istorioù. Pa oan yaouankoc'h e lennen Pif, Astérix, Tintin ha kement 'zo, hep bezañ dedennet-spontus gant ar bannoù-treset o-unan. Tec'hout dre lenn a raen kentoc'h gant sikour ar skridoù istorel ha gant ar romantoù troioù-kaer. Kozh-tre eo ennon ar c'hoant ober studioù istor. Dre zegouezh on en em gavet gant ar bannoù-treset. Goude bezañ sinet daou heuliad e ti *Vents d'Ouest*, em eus dibabet e savfen istorioù e-korf tresadennoù bev. Kas traoù da benn en desped din a blij din !

T : Gant petra out dedennet a-fed arzoù (tresañ, livañ, skeudennaouiñ) ha perak ?

LC : Dre ma tibaban an doare tresañ hervez an istor a gontan eo anat on levezonet gant danvez an danevell. Er poent-mañ e klaskan tresañ hervez teknikoù on bet plijet ganto, kinniget gant *Lautrec*, pe livourien evel ar *re Nabi* ha *Vuillard*, kizelladurioù giz ar bloavezhioù 40, ha kement 'zo...

LC : Peseurt doare farsadennoù bannoù-treset a blij dit ar mutañ ?
T : *Achille Talon* ha *Spirou* met n'em eus nemet ur soñj diresis

anezho dre ma n'em eus ket adennet an albomoù-mañ abaoe 15 vloaz. *Reiser* eo ma skouer a-fed kontañ. Pe c'hoazh *Astérix*, un tamm, dre ma kaver ennañ gagoù strewet a-hed an istor. *Willem* ha *Vuillemin* a blij din ivez...



"Sir Arthur Benton" EP éditions

T : Tresañ a rez diouzh doare an istor a gontez. Ha dav eo d'an tresañ mont da heul ar c'hontañ ?

LC : Evel em eus lâret kent eo en un doare naturel e cheñchan ma doare tresañ, hervez an doare ma santan ar pezh a vez roet din da lenn. Setu un doare a c'hell bezañ gwelet fall e bed ar bannoù-treset, boazet ma vez heñañ da lakaat an tresañ da vestr.



"Le tsar fou" EP éditions

Diaesoc'h eo ivez dont da vezañ brudet, met d'erc'hel a ran d'am doare, memestra. Evit se eo ne vrudin ket anezhañ muoc'h eget se dre ma 'z eo arvarus-mat, dreist-holl evit an dreserien yaouank.

LC : Ha priziet eo labour an istorour, hiziv an deiz ?

T : A-drugarez da *Goscimny* ne vez ket sellet mui ouzh labour an istorour evel un islabour. Kemmet he deus ar vicher ha muoc'h-mui a blas a gemer an hini a skriv an istor. Dre vras o deus an holl dreserien ul live mat. Setu war an istor an hini eo e vez graet an diforc'h. Un tresañ a-feson en deus ezhomm skoazell un istor brav evit d'erc'hel al lenner e-skour. D'ar saver istor da zegas elfennoù a vroud an treser da vont pelloc'h-pellañ gant e deknik. Frouezhus-mat e rank bezañ an eskemm a-benn krouiñ.

T : Sevel ur farsadenn war ur bajenn pe ziv a ya dit pe a seblant bezañ diaes ?

LC : Diaesoc'h eo, da geñver doareoù em eus pleustret ganto dija. Met plijusoc'h ivez. Buanoc'h e teu an disoc'h dindan an daoulagad. Renet e vezer gant ar blijadur.

LC : Petra a dalvez evidout bezañ lakaet e brezhoneg e-barzh Meuriad ha, pelloc'h, peseurt talvoudegezh a roit d'ar yezhoù bihan

T : Dreist eo. Liesyezhek on-me. Mestroniañ meur a yezh a lak an den d'en em zigeriñ war ar bed, da zegemer an dud disheñvel hep kaout aon, da virout ouzomp da vezañ bac'het ha troet warnomp hon-unan. Laouen on, evel-just. Ar wech kentañ eo din sevel un istor hag a vo embannet en ur yezh all estreget ar galleg.

T : Raktresoù ho peus e vefes prest da ziskuliañ deomp ?

LC : Adkemeret em eus rummad *Les Morins-Lourdel*. Echu eo al levrenn 4 a zeuio er-maez e ti *Glénat* e miz

Meurzh. Gant *Tarek* e labouran war ur rummad, *Le tsar fou* a rankfe dont er-maez goude an hañv e ti *Emmanuel Proust éditions*.

LC : Daoust hag ez eus bannoù-treset ha keltresadennoù er broioù arab ?

T : N'eus ket, pe dost. N'eus nemet un nebeud albomoù *Tintin* ha *Astérix*, hag a zo bet troet. Bev-buhezek eo ar c'heltresadennoù e broioù arab : e bro-Ajeria, e bro-Ejipt met ivez e bro-Siria, e lec'h ma vez gwellet litreserien vrudet o pismigañ doare mont en-dro o bro. Traoù a chom d'ober c'hoazh, koulskoude...

T : Peseurt ali a rofes d'unan e dije c'hoant da vont war hent ar bannoù-treset ?

LC : Kenveriañ e labour gant hini ar re all, tud a vicher pe izili ur gevredigezh, a-benn kaout ur sell a-belloc'h war ar pezh a ra. Micher an dud digenvez eo hini an treser ha buan-tre e c'hell an den em vac'hañ en e ved dezhañ e-unan. Setu...



"Sir Arthur Benton" EP éditions

LC : Ha soñjal a ra dit eo ar bannoù-treset ur media engouestlet, ez-politikel ?

T : Sur ! E *Sir Arthur Benton*, an albom a lakaan da zont er-maez er miz-mañ e ti *Emmanuel Proust éditions* ez eus kaoz eus an eil brezel bed. Ul levrig eizh pajennad o tisplegañ kresk an naziegezh e bro-Alamagn. Un doare keodedour evit reiñ da c'houzout d'al lennerien eo dre votiñ he deus gallet euzhusañ dikatouriezh ar c'hantved tremenet ober he hent betek ar galloud. Aozerien all a zo engouestlet, int ivez, evel *Stassen*, *Sqaurzoni* pe c'hoazh *Vincent Alagbé*.

Kregiñ a ra an 9vet arz d'en em zibober eus a skeudenn a ziboelegezh.



SIR ARTHUR BENTON
Tarek / Stéphane Perger
Tome 1 - Opération Marmara
EP éditions

BIZI marc'heg al liorzhoù Jean-Claude FOURNIER

En em gavel eo Marc'heg al liorzhoù e kribzu. Met paket en deus ul lamm, swazh dezhañ.

RO AR GAROTEZAN-SE, UN TAMM EUS UR GWELA-DEANNER.

PETRA!

FORZH, PETRA!

BISKOAZH KEMENT ALL! BIZI A ZEGEMER KAROTEZ HAG A RA GWELADENNERIEN ANEZHO.

GWIR, EO.

BRAN E VÊRE DIT DEGEMER GWELADENNERIEN SEURT-SE NEZ, RAK DA RIBTAILH ZO DJI GANT AN NAON!

UR TA BULI, PETRA ED MARCHEG AL LIORZHOÙ?

A! N'OU, ZOC'H KET?

HERVEZ AR VOJENN E VOE GANET DIWAR UR PAOTR-ERC'H HAG UR SPONTAILHEZ, DALIT, TAPIT SE.

ABADE PELL-PELL EMAN O KANTREN A VRO DA VRO HA RAL ED EN EM GAVOUT GANTAÑ.

AR CHANIS-SE HON EUS BET HA SETU AR PEZH A CHOM ANEZHAN: UR STAL LEGUMAJ.

MA! ADFAVET E VO HAG E VO!

PE GRAET E VO! SOUBENN!

A DEP SEURT SOUBENN O DEVEZ AN DID EN O DUHEZ! C'HA C'HA!

EEEEEE!

AIOU!

BOM

FARS DA LEIN, PEDEZH GENOUEG!

MAT AN TRAOÙ, SCHOGBUL?

EVIT DOARE.

FELLIT 'TA, BIVJ, AR BERENN-MAF, N'HON EUF KET HE GWELET BREMAIK?

NAN! PENN-DIAMIK! MARD EO D'AR MARC'HEG E VO DIAES E KAVOUT HE LEC'H.

GOUDE...

BONEGOÙ-KORRIGANED... BISKOAZH!

EMGROUET INT, MOARVAT, DIWAR KEJADENN AN AER HAG ULOCH PA DORRAS AR VOUTAILH GWERVOURC'H.

PETRA EO FE?

TODGOU-TOUSEG HAG A RA AR GORRIGANED GANT AN DISTREMPANEZHO DA ARGAS AR STROBINELLOG A DVALER WARNO.

SETU, NE VO GRAET NETRA GANT 'M EUS AON MET O MIRET A RIN, KOLLSKOUDE... ROUEZ-KENAN INT.

MA... DEOMP DA WELET AR PAOURKAEZH MARCHEG.

UN HANTERURNEZH D'INEZHATOC'H...

DIWALL!

ARFA-FRIVAL 'RA?

KET!

DRE MA N'OUZOMP KET FELECH LAKAT AR BERENN, SUR.



NEMET HAG UN ABEG ALL A NEFE, GWELOMP...



N'EM ELUS KET BET AMZER DA BEURLENN AR PENNAD.

...d'ar...
 ...d'ar...
 ...d'ar...
 ...d'ar...
 ...d'ar...
 ...d'ar...
 ...d'ar...
 ...d'ar...
 ...d'ar...



MAR C'HOARVEZFE D'AN TAMMOG DISTAGAL E RANKFED O ADDEGAN GANT SEV FENEKOTOA.

A?



FENEKOTOAK
EN TIR LOUET EO E KREFKONT



HA N'EO KET ECHU SELAOUIT SE : ... WAR DIVJOD AR MARC'HEG LEDIT JOD BLOMURZH.

EEEE! FROUEVH DIWELLV EO AR BLOMURFH!



GOUZDIT A RAN AR VILZIGED HEP. KEN O GWEL HAG A RA KOPADOG GANTO.

FFERE DOG AR GOADEG? AR VILTANFOU, FALLAKR-FE?!



YA. AR RE-SE 'ZO DIWELLV NEZ 'VAT, NEUZE...

GWELL A VE! N'EM EUF TAMM C'HOANT EBET D'O GWELT, AN DIAOULED-FE, ME!



KOMPREN A RAN A-WALC'H... PADAL, MAR NE FELL KET DIMP SACHAN AR REUZ WAR HON TI E RANKIMP MONT D'O C'HAOUT.

AOAH! REUV A-WALC'H 'M EUF FAC'ET O KOUEVHAN WAR HENNEFH!



BIVI, FELLIT, FI... FI'IVAL'RA!



C'HIC'HI!



C'HIC'HI KOUKOU!



KOUK... MA...

O PO POP / HIZN N'INT KET TROET DA / C'HOARZHIN!



ARABAT DIT OBER SE / C'HOAZH, MUKEZ!



ERRU ON SKUIZH GANT AR BERENN-MAA, PENALCHOLIK!



UNAN ALL EO... GANIN EMAN AR GENTAN.

PETRA? NE GOMPRENAN SELURT!



OPALA! OPALA! FARZ KRABAN BETEK N'O DEVO KET C'HOANT DA ZEBRIN AR FROUEZH-SE!

BEVET E BREZHONEG



TANGI MEVENA

Ur strolladig tud yaouank, e hoant ganto implij binvioù an amzer a-vreman evit kas war-dro ar yezh, evit klask tizhout ar re yaouank all. Krennarded o verañ o-unan o c'hevredigezh. Setu "Setu"

Mevena : Tangi, petra en deus lakaet he hanter da grouñ "Setu" ?

Tangi : Pa c'amp en elvet klas hon eus krouet ur film berr, "Ar wenanenn", gant kamera niverel al lise. Deuet omp a-benn d'ober ur film fentus, aes a-walc'h. Goude he deus frammet Mevena anezhañ ha diskouezet ar filmig deomp. Souezhet omp bet o welet e c'heller ober traoù dereat gant hebeut a zafar. Neuze hon eus divizet krouiñ ur gevredigezh hag a sikourfe ar re yaouank da sevel raktresoù kleweled e brezhoneg.

Un diouer a zo war an dachenn-se ?

Mevena : Evel-just ! Ne vez kinniget abadennoù e brezhoneg nemet e-kerzh "Red an Amzer" war F3 - ha c'hoazh ne vezont ket skignet e Breizh a-bezh - pe war TV Breizh. Ha ne c'hell ket an dud resev homañ diwezhañ ivez. Ouzhpenn-se, ne vez ket kinniget ar bern traoù evit ar re yaouank, ar pezh a zo dipilus evi-domp.

Petra a vevet ?

Tangi : Filmoù ha kement 'zo. Evit ma 'z afe stad ar brezhoneg war wellaat e vefe ret kaout traoù disheñvel : lennegezh, sonerezh, pezhioù-c'hoari ha filmoù.

Piv eo ho skouerioù, war dachenn ar c'henn-ved ?

Mevena : Dre vras eo ar memes re evit holl izili ar gevredigezh : Les Nuls, Eric ha Ramzy, Jamel Debbouze, Les Inconnus.... Pep tra hag a zegas fent en un doare pe en un doare all, a

blij deomp, gwir eo. A-wechoù e vez adkemeret farsadennoù graet ganto. Allas, e Breizh, e bed ar brezhoneg ne vez ket re da zibab evit kaout skouerioù. Setu ret eo deomp sellet pelloc'h.

Colombo e brezhoneg : Ur mennozh, pe ?

Tangi : ...h e yezh ar vro 'vefe, ... Met ar rummad-se, ... d'ar re yaouank. Ne ... e brezhoneg. Evit ... adennoù bev e vez ... zehioù. Mouezhioù ... ank. Prest eo ar re yaouank ... urat war an dachenn-se met ne ... penaos en em gemer, penaos bez ... ouet. Un diouer a gelaouiñ a zo

Tangi : Ar vou ! Aesoc'h eo da dud yaouank dedennañ ha sachañ evezh tud yaouank all, eget ma c'hellfe tud "koshoc'h" hen ober. Ouzhpenn-se ez eomp dazont ar brezhoneg. Abalamour da se eo ret deomp ober traoù evit sikour ar yezh hag ar sevenadur.

Gant persurt dafar emaez e sonj labourat ?

Mevena : Evit ar poent hon eus labourat gant ar pezh a oa ganeomp, da lavaret eo ur c'hamera niverel, un urzhiataer, ur poellad evit frammañ, met spi hon eus e c'hellimp gounit un tamm arc'hant ha, dre-se, kaout muioc'h a zafar evit mont war-raok : mikroioù, sistem goulou...



Mevena : Fellout a rae deomp kaout un anv berr ha simpl. Bez' e c'hell forzh piv soñjal ar pezh a fell dezhañ : "Setu traoù nevez", "Setu raktresoù evit ar re yaouank" ha kement 'zo.

Ober gant an dud pe ober evit an dud ?

Tangi : Pal "Setu" a zo sevel raktresoù GANT an dud hag EVIT an dud. Digor eo d'an holl, ha gorloz a reomp soñjoù pe alioù (setu@hotmail.fr)

En un doare pleustrek, petra c'hortozit ouz ar re all ? Istorioù, deoc'h da lakaat anezho e stumm filmoù ?

Tangi : Seul vuioch a draoù a ginnigoù hon do, seul vuioch a draoù a vo graet. E lise Diwan hon eus lakaet e plas ur genstrivadeg-senario a-benn kaout danvez sevel filmoù da vezañ diskouezet en diavaez.

Mevena : Klask a reomp ober traoù gant tud yaouank, evel-just, met sikourioù hon eus




ezhomm a-berzh tud gour. Mamm Mevena he deus kemeret ur perzh bras evit frammañ ar film "Piv ?" emaeomp o paouez echuiñ. Ennañ e vez tud gour o c'hoari, ivez. Ar pezh a zo yaouank eo kentoc'h ar mennozhioù.

War dachenn an arc'hant, penaos e vo skignet ar filmoù ? Penaos e vo gounezet arc'hant ganeoc'h evit gelout padout ?

Mevena : Dre hanterouriezh ar gevredigezh e klaskomp kaout arc'hant gant ar Rannvro ha gant aozadurioù all. Met, evit ar poent, n'hon eus netra. Ar pezh n'eo ket anat pa fell deomp mont war-raok. Evit skignañ ar filmoù e klaskomp ivez tud hag a c'hellfe sikour ac'hanomp.

Tangi : Den ne oar. Nevez-flamm eo ar gevredigezh. Met, a dra-sur, e kendalc'himp goude al lise, ha spi hon eus e talvez d'ar re dedennet.





MA, NEUZE
PENAOE
E KAVES ?

M'YA, KET FALL...
MET PERAK KEMENT-
SE A VIZER ?



MET, MEMESTRA, D'AR
MARE-SE, E OA KALZ
A DUD A OA DIAES
DEZHO BEVAN,
BERR AN ARC'HANT
GANTO.



'KET POSUPL !
BERR AN ARC'HANT
HAG E C'HOULENNONT
O FOLTRED
DIGANT
'LE NAIN' ?



Bez emañ Beaubriand ha Lagry oc'h en em gannañ evit kalon Juliette. E-kell-se emañ ar c'houanted o klask kemer kâr Grandville. Dominique hag Alain ROBOT



BLAM!




HOESE NE VEE'E'H
DELET A-BENN DA
LAC'HAZ ANEZ-HAG
AOTROU...



HAG EHAG E WREG
EN HO TALC'H.

SE NE
GREDIN
KET...

TONSARD !
PETRA EHAD'H
D'C'H DBER
KE ?




PENADS
J'ARËT
DEZHO ?

AR SEIZIZ-HAN, N'ELUS FIN
ERET DEZHAN PETRA TEUMP
DA VEZAN ?

HUGUES!! HA OMELET 'FEUS BAUBRIAND ?
PELEC'W EHAN ? KOMEZ TA !!!

HA... HA...



NE GOMPRENAN
SEURT. H'ARZ AR
VOGER NORZH EO
BET N'ARËT KOMEZ
BAUBRIAND

NE C'HELL KET
BEZAN BET
LACHET GANT AR
D'OUINTEG. WAR
HOGER AR SU
E DA AR RE-HAN
O TIKRERAN

BAUBRIAND !

E !

JULIETTE !
GORTOZIT !



JULIETTE !
DITROIT !

MAHIG !

'RABAT TENNAÑ
WARNI !!!

KET !
KET SE !!



DEUIT BUAN,
GABRIELLE.
ARABAT DIT
C'HOH AZE.

C'HOANT 'H
ELUS ONELET
MAMH !

GABRIELLE! DEUS EN-DRE DIOUEWU!

LADOK!
LADOK!
K'NANON !

MAMHG !!
MAMHG !!!

!?

TAPT
ANEZHI !

A-SKACH HA TISMALLIHEZ
EMACHT ANAZ !

DETU,
ECHU
EO ?

Da vezan kendalc'het...

GERIOÙ m'eskët


pEsk-Ebrel

Gant ar GERIOÙ a hÔmo e c'heller Ober Ur FRAZENH.
(ev deoc'h da arz at izidreanôù,
lienna goude lienna)

NA KSAPEGOENEVEZAMZER
OTOUELLEREZHNO DRAPPA
ARGOARBKSAFNUHZISABV
NTOEREHPASTOI
LSKUZHEPAIP
EESKZHEAI
RZELNH
BANELEOEK
EONELGLE
GRNEPMG
IGZUMKEI
GRNDMONN
OAINHOKE
KRTOTHEMLRG
KECNBELEGIZ
LNEURRNNEZALGUEA
EEDOJELINENNUOR
IWESFENTIGELLOUTLHKO
EGALEUOGZARGRATNEHI
RDGVEVIERUONNEDASRAFV

- Aviel
- Beleg
- Bourd
- Braog
- Dasorc'hidigezh
- Eog
- Farsadennoù
- Fentigelloù
- Gevier
- Glazenn
- Kleier
- Kogig Ebrel
- Komunion
- Koñchennoù
- Lenkr
- Morzer
- Nevez Amzer
- Oan
- Pardon
- Pasion
- Paskañ
- Perlezezh
- Rouzeñn
- Sizhun-Fask
- Sul-Fask
- Touellerezh
- Touilh
- Tromplerezh
- Vioù

Frazenn da gavout



REFORT: C'HOASIOU AN NIVERENN 25.
P. 12
SUS DA GER D'UNAN ALL
A. del-tio-vai-sus-tou-oue-kar-tom-
kad-our-mel-lou-fan-kan-tin-tal
B. Têl-têl-our-tat-mel-oué-tou-kan-
tas-men-tal-lou-kan-tal-pin-akl
C. Tak-tat-our-kan-kan-tal-pas-
tas-tat-pak-tat-kan-tal-pak-tat
DA BEP SIFR E LIDRENN
1/A-2/D-3/R-4/A-5/R-6/T-7/R-8/T

P. 13
AL LIDRENN A VANK
ko-r-i-g-a-n-e-d
AN NIVERENN
pouz/pouz/mou/elle/lise/live/
lone/lou/lou/pou/tem/tem/mou/
out/tee/ete/ete/ete/ete/ete/ete/
pate/val/len/mou/man/kan/sant/
sant/sant/tem/tem/tem
P. 14
NEZ-DIVET
kisek-sakell / archar-charge

laban-baban / marc-aren
tadan-kestan
AN GER KUIH / palme
YMP HA BIS
E KAMBR AN STERED / pell / prun /
nevez / main / lier / neuz
P. 15
SUS DA GER D'UNAN ALL
MOU-DEG / TEVA-DETEV / TEVA-
STRE / SANT-JA-ASANT / ALAN-ALAN
KUIH-DIVET / MALAN-ALAN
ANTR-D-TRIDAN / TRIDAN-ALAN





Istor farsus **Yann Bijer**

Gwin an den dall

An deiz-se e oa tizh gant Job, o vont war gaut ospital ar re gozh evit rentañ bizit d'un eontr dezhañ. Paket e oa Job diwezhat gant e dro, rak tost da c'hwec'h eur noz e oa.

— " Propr e vefe din prenañ ur voutailhad win d'am eontr ", a lavare outañ e-unan.

E-tal an ospital, dres, e oa ur marchadour gwin o chom. Setu Job tre, en ur lavaret :

— " Ur voutailhad win, hini mat, a fellfe din prenañ. Evit ma eontr kozh an hini eo. En ospital emañ. Hastit fonnus, mar plij, rak paket e vin re ziwezhat bremaik. Serret e vo dor an ospital a-benn un hanter eur ac'hann."

— " Ha peseurt gwin a vo lakaet evit da eontr kozh ? Hini gwenn pe hini ruz ? "


— " Neus forzh peseurt hini e vez : dall eo ar paotr kozh."

Ur vamm alumetezenn a lâd d'he bugale a zo o vont da dremen arnodennoù :

- Bezit dinec'h. Tremen a raio mat. Ha zoken ma ne ya ket, arabat deoc'h skrabañ ho penn.

Ewen, 11 vloaz

Tresadenn ar miz



Eva Pasquier

ERRATUM : ar wech nemet eo bet dibabet un dresadenn graet gant Noel ha ket Gweltz. Mil digarez dezhañ

Kasit deomp ho trEsAdEnnOù.
Ar re wellañ a vo embannet
keit-vimp-bev@wanadoo.fr

embannet gant :
KEIT VIMP BEV
22, grand rue
29520 LAZ
Pgz : 02.98.26.87.12
Plr : 02.98.26.80.35
keit-vimp-bev@wanadoo.fr

Moulet gant :
OUESTELIO
505 st. Julien de la Graviere
BP 30708 BREST cedex 02

Pener ar gazetenn
Yann-Fañch JACO

Resortzhari / Maketenn
Tresañ ar c'hoarioù :
Owen POHO
owen.kvb@wanadoo.fr

Tresadenn ar golo :
A. ROBET

Skoazellerien :
Paolig MARQUAND
Yann GUICHETEAU



Niv. CPPAP : 1005 G 840 75

DARIUS Gilles SANGLA



